

# DISPUT

ENTRE

## AN INI GOZ HAC AN DEN YAOUANG.

Compagnunes melab pa deuit dam deputin  
Da gavan eur chinson men ia do contantin  
Couscoude pa sonjan na meus na mocs na mesur  
Da dont da recrein sperejo so quen fur.

Rac-se auditoiret nin a houlen escus  
Na deufe ma chanson da vean innoüs  
Evel ar sermoniou ar muian consequant  
A guel cals innoüs bars en amser bresant.

Breman so tri bloaves ma laquet ma speret  
Da garet eur fleuren rouannes ar guenet  
Ol efejo Venus en gravas em halon  
Imprimet evit mad de mab Cupidon.

A bars eur bloaves omp nen darempredet  
Gant guir fidelite a cals deus a respet  
Esperans e moamp da gat possession  
An eil gant eguile en desir on halon.

E mam pa deus santet e moamp ar volonte  
Vit enom unissan an eil gant eguile  
Na dime e deus treusplantet eur spernen  
Lec'h ma moa esperans da gavet eur fleuren.

Troublet e ma speret ma goad em goasion  
Pa sonjan bars an astr a bresit dan deïou  
Pehini a ra din a greis ma joaüsdet  
Renonç dar blijadur, a bean captivet.

E han betec e mam gant eur speret confus  
Car sur on da gavet diganti ma refus  
Mes ar proverb so guir ac a lavar evelen  
Pa soueter eun dra e gleer en goulen.

Salud mam rigourus ganec'h ma ar c'heve  
A el rain din ar maro petramant ar vue  
Na neus nemet en gwir, diouti e tepant  
Da rein sur anuiet deur galon languissant.

O neal den yaouang ne nequet a vremen  
O heus bet ar refus vit ar voach quantan  
Seblantout a ra din e quefed mad quignon  
Pa deut quen alies da usan ho potou.

Ar Gananeen goësal dre importunite  
A obtenas e goul digant eur guir Doue  
Dre ma meus sonjet dont boas bete aman  
Da glasq evit priet an hinin a souhaitan.

Coms a ret ma mignon evel eur perroquet  
Quement a blij deam nefe hoant da gavet  
Mes houi ma heus hoant da ober o havantur  
Chanchet a roujou ha houi vo muioç'h sûr.

Penos chanch a roujou na neus quiet a voyen  
Da gavet en nep lec'h certain eur feumelen  
Capabl da contantin desirou ma balon  
Pan de evit o merc'h ma opinion.

Un opinion ven, credet eo o hini  
Ma requit cat ma merc'h evit ho contantin  
Birviquen ne goasquet gaat ma bolonte vad  
Nan, a pa rofac'h, sur, guenno o taoulagad.

Arretit eun neubent enem reflexisset  
Pa voac'h voar ar poen-se, certain ne garjac'h quiet,  
Evit netra abet cat ar séparation,  
Deus an hinin a re pljadur o calon.

Ho comsou den yaouang so re importunus  
Studiet o heus int gant cals deus a rus,  
Mes o hol finese na rein impression  
Re gos on da laqat en pratic o sermon.

Crean opinion so bet voar an douar  
Evoa Perias en raport an histor, ar  
Ne devoa nemet eur verc'h ma teuas de demei  
Da nep displije dei evit enem venji.

Men houl digant Doue a so ol buissant  
Pan heret quen neubent da rein ma hoant

Neuse hellent laret emo bet eur faveur  
Ar pes na ari quiet er bet-man gant nemëur.

Biscoas Pompilius, Alexandr, na Cesar,  
Nac an Napoléon pa voa voar an douar,  
No deus raportet certain en o bue  
Eur victoar evel homan ma harise, sûr se.

Coms a ret den yaouancq bars en termenno  
Pere so ancien a tremet pel a so ;  
Sellet ous ma bleo gris penos int heriset  
Ma na net no rout me rei dac'h monet.

Arretet ma sintin, arretet me o pet,  
Ma na ret din danve evit ober eur vrek  
Me ia da bartian mes sonjit en guir  
Na nime get contant ep caveat ma desir.

Mo pet na chomit quiet re bell da discorin  
Ma goat na ma speret nell pelloc'h andurin  
Quentoc'h voelfac'h an eol d'anter-nos o paran  
Vit ne po respout vat o tont betec aman.

Arsa ! eta mam gri dinatur a digar,  
Na gredan quiet ve o par voar an douar ;  
Lacat a ret daou den oe enem gar fidel  
Deus a greis o yebet gant glac'har da vervel.

O neal ma mignon se na ario get,  
Me meus remejo a pa voint dispaquet,  
Ac a ve clan ma merc'h gant clevet an amour,  
Boguellic ar vœen a reio dei sicour.

C'han da partian gulet ran er vat  
Na meso get brema diganec'h ma mennat  
Da vla mar ben dispos credet me ario  
Hep dont da varhata neuse nin heurejo.

Chanj canton, parbleu, digaset din ma bas,  
Vit ma teni da hoari brema son voar ar plaç,  
Ma neget plen o chouk brema me en pleno,  
Deportet eun neubend ma treusin o quillo.

Nep a vœlje ar vroac'h o c'hoari e ferchen  
Defot da gaat ar yas, croq bars er scubelen  
Scrignet ganti e dent vel eur hi arrajet  
O sonjal ma spontant ac ober din redet.

Nep a vije eno o velet an debat  
Ar vroac'h gant e scubelen o esse ma filat  
Me grogas eur pennat vit difen outi  
Dre ma oant ar c'hrevan honas a parti.

Trompet voa an hini gos ma defoa ar greden  
E plecjen sûr ma chouq dindan e scubelen,  
A lesen so commun bras en toues an ol  
Dampech peb ini da hoari e rol.

Neuse e quitaïs, gulet a ren erfat,  
Voa tremenet ar houl da gavet e grasso mat :  
Lipran moa da ober voa pellat diouti  
Pa na voa quiet a voyen den em accordin.

Chetu nin desolet nen dristidiges vras  
Evel eur merdeat en creis ar mer bras  
Pa deu e vatimant da frescin dindannan,  
Na vœl nep remet nemert da perissan.

Na meus dam honsolin mert ma muan caret,  
Pa han da Landreguer en nem voelomp bepret :  
Neuse nen goseomp an eil gant eguile,  
Evit ampech da usan chaden an amitie.

An nent deus ar fortun a nevens daou goste :  
Unan so evit ar mad, ac ar prosperite,  
Ol a ebiquer an art evit antren ennan  
Cals a dro en tu fal ac a renq perissan.

Ma fel dac'h clevet breman,  
Piou neus composet ar chanson man,  
Eun dennek divalo a speret,  
Evoan Sourimant he hanzet.

# CANVOU AR PAOUR MOUSIK BIAN

D'AR WERC'HEZ

War don : *Potred Plouilliau. Kan 78*

Va mamm, 'liez, ha va ferson  
Ho deus bet lavaret din  
Ho pidi a-greiz va c'halon  
Ha d'an noz a d'ar mintin.  
Va jelaouet, Guerc'hez santel !  
Evit mamm ho kemeran :  
Eur zellik hep-ken, ia ! eur zel  
War ar paour mousik bian !

An evnedigou pa greskont  
A ia er mez euz ho nez :  
Da gentan gand aon e nijont ;  
Ho mamm ho diwal a gouez.  
Pell e va mamm, Guerc'hez santel !  
Evit mamm ho kemeran :  
Eur zellik hep-ken, ia ! eur zel  
War ar paour mousik bian !

Pa meuz bet laret kenavo  
D'am mamm baour war he gwele :  
Pegoulz, 'me-hi, e teui enn dro ?  
Ha va mamm baour a wele !  
Sec'het e zar, Guerc'hez santel !  
He foan zo va foan brasan :  
Eur zellik hep-ken, ia ! eur zel  
War mamm ar mousik bian !

Va c'hoarik vad, va c'hoar Anna  
A iel' d'an iliz bemde  
D'ho pedin, Itron Varia,  
'Vit va zad, 'vidon ive.  
Chelaouet-hi, Gwerc'hez santel !  
He ine 'zo ar c'haeran :  
Eur zellik hep-ken, ia ! eur zel  
War c'hoar ar mousik bian !

Pa iemp da laret hor bater  
Hon daouigou d'ho chapel,  
Va c'hoar 'lare : « Sel, breur ker,  
» Taulen ar Werc'hez santel :  
» Hi a c'hoarz onzomp gant true ! »  
(E homp enn oad teneran.)  
« Va zellet ha va breur ive  
» Ar c'hez paour mousik bian ! »

Enn ho taulen, o Guerc'hez kaër,  
E weler ho mab Jezuz,  
War ho ti-vrec'h, Bugel dister,  
Ker mad, ker karantezuz !  
Netra n'hell ho Mab dinac'hi  
D'ec'h-hù 'zo rouanez enn nean (env)  
Hui a hell eta difenni  
Ar c'hez paour mousik bian !

Va mamm a lare d'in 'liez :  
« Ar mestr a bep tra e Doue ; »  
Mez Jezuz zo Mab ar Werc'hez ;  
Petra ne hell mamm eur Roue ?  
Va diwallet, Guerc'hez santel !  
Evit mamm ho kemeran :  
Eur zellik hep-ken, ia ! eur zel  
War ar paour mousik bian !

Hon lestr war gein ar gwagennou  
A nij henvel ar gwinel  
'Kreiz ann oabl ; — he gweliou  
A zo henvel diw-askel.  
D'oc'h droug diwallet-hi, Mamm santel !  
Pa gorn ar mor heüzussan ;  
Kemeret dindan ho mantel  
Lestr ar paour mousik bian !

Gand an neve-han, ar gwinel  
A zistro gand calz a joa  
D'he bro gentan ! — Er broio pell,  
Gand he bro e sonj a oa !  
Ah ! bro er-bed n'e d-e ker kaër  
'Vel ar vroig a garan !  
E man, bepret e vo er ger  
Kalon ar mousik bian.

# CANAOUEN NEVE

Gret en honor da beder dimezel yaouanc.

Ma mije speret Apollon  
Ou l'esprit d'un Voltaire,  
Me mije composet eur son  
Mais, hélas ! comment faire,  
Couscoude me a so pedet  
Par quatre Demoiselles,  
Da ober deze peb a couplet  
Mais, hélas ! comment faire.

E han da gommans da guentan  
Avec peu d'éloquence,  
Dre unan anezo so clan  
Mais malgré ses souffrances,  
Atao e deus eun air contant  
C'est ma Virginie ;  
E daoulagat a so brillant,  
C'est ma petite chérie.

Mamzel Lorenc so eur rosen  
Une fleur chérie,  
Hi a deus eun daoulagat  
Ils sont dignes d'envie  
Eur speret dous eur galon vad  
Une tête capricieuse,  
Me a vel voar e daoulagat  
Qu'elle est très-amoureuse.

Elouison a deus eur brestans  
Un air très-agréable,  
Comparaget é ous Ortans  
So eur fleuren aimabl,  
Espécial pa ve guisquet  
Coiffée en artisanne,  
E eur blijadur e goelet  
On la prend pour Diane.

Hoas a meus eun al da ober  
Et pour une jolie blonde,  
A deus eun daoulagat seder  
Et une bouche ronde,  
Me gret e hé eur-min arc'hant  
Quand on s'approche d'elle,  
Me a lavaro franchamant  
C'est la charmante Adèle.

Me gret var an dimezelet  
Avoir rempli ma tâche  
En cas a ma venn bet manquet  
Aucune d'elles ne se fâche  
Prest on da guemer ma fluen  
Pour corriger l'ouvrage  
Pe d'en adober pen a ben  
Que je puis davantage.

An hini neveys gret ar son,  
N'a point de rhétorique,  
Aliès e rim ep raison  
Il brave la critique.  
Mes ma mije bet studiet  
Un peu dans les sciences  
Marteze nije composet  
Avec bien plus d'aisance.

Lannion, J.-F. Le Goffic.

(Propriété.)